

CANTIC SANTEZ ANNA VENED

Var eun ton ancien

Me o suppli, tud devot da zelaoud a galon
Eur c hantie spirituel gant guir devotion,
A zo grêt enn gloar Doue hag e Vam ar Verc'hes,
D'an itron Santez-Anna, hom guir advocadez.

Mes kent avanç davantac'h, goulennomp ouz Doue
Ar zicour, an assistanc, sclerijen euz an év.
Dre intercession ar Verc'hez hag ar Speret-Santel,
Da composit eur c'hantie da gana en Breiz-Izel.

Me a gomz a eur plac santel hag ancien meurbet
Frekantet a bep contre gant an dud affliget ;
A Leon hac a Dreguer, a Guerne, a Goenet,
A bevar c'horn ar brovinç e teu pelerinet.

Pebes douter a zanter, hag ive pebez joa,
Pa vel ar belerinet ilis Santez Anna !
Ancourachet é souden ezomou ha scouder,
Ne zomer mui eus souffret, na tourmant na mizer.

Oc'h antreal en ilis, pebes contantamant
A zant eun en e c'hichen eno en eun instant !
O Itron Santez-Anna ! emea, a greis calon
Me en em brostern d'ho treid gant guir devotion.

Sellit en dro d'an ilis eun niver tolennoù
Offret da Santez-Anna en faveur ar vœuyen
Gret er momet an danjer, hag a so exaucet,
Dre balloud Mam ar Verc'hez e pevar c'horn a bed.

Dezir a meus, Bretonnet, da siscleria brema
Ar miracloù admirabl a ra Santez-Anna :
En escopti a Voened, tostic d'ar guer Alre,
E man tensor precius d'hon c'horf a d'hon ene.

Jeanned ar Bescon anvet, a escopti Goened,
Españc demeus a zeis vloas privet d'eus er c'herset,
En em guestas gant fizianç ha guir devotion
Da vont da Santez-Anna euz a greiz e c'halon.

Casset voa en eul letier gant daou den assistet,
Rentet en Santez-Anna pa e doa desirét ;
Evel ma yas en ilis, dirac Santez-Anna :
E kuitas e branellou, ma zavas en he za.

Divale a ras d'ar guer hep den d'he asista,
E branellou a lêzas dirac Santez-Anna :
E maint c'hoas en ilis, peb den e oll gûelet ;
Meulet ra vezo Jesus hag e Vam beniguet.

Marc'harit Costion ive, a guichen Quemperle.
Zo bet pell bras languissant chomet var e guele ;
Mes e zad e brometas eviti eun novet,
En illis Santez Anna, me dize iec'het.

Var ben daou zeves goude ar plac'h-mâ a zavevas.
Admiromp oll, christenien, eur miraclo zo ker bras
E deus grêt Santez-Anna en kichen Quemperle,
En andret eur plac'h yaouanc e fede nôs a de.

A Vrest, eur soudard devot, e ano Sant-Amnda.
O tremen ebars eur c'hoad en em gavas gantan
Pevar forban debordet var an hent o laeres,
Hac a c'houlennas outan e yalc'h pe e vuez.

Ar zoudard, pa o c'hlevas, a lavaraz dezo :
Me a zo eun tremeniat, ne meus quet a vadou,
Hac a ya da bardonna da Santez-Anna Voened,
Mar be madeles Doue da lêzel en yec het.

Ar mestr demeus a laeron a zistroas outa
Gant eur vistolen karguet, en esper de laza ;
Evel ma sonjas tenna, e vrec'h outa zonnas,
Ar vistolen euz e zorn d'an douar a goezas.

An tri laër all, pa veljont voa brec'h o mestr zonnet,
A c'houlenn out ar zoudard hac en doa e sorcet.
Salocroas sur, emean, n'en d'on quet eur sorcer ;
Jesus ha Santez-Anna am breserv dious maler,

Ens ar guever Rostrenem eur miliner yaouanc
P'oa ho lemma e velin e toras ar palanç,
Ma chomas entre daou ven, ma sonjer voa lazet :
An itron santez Anna en deus en preservet.

Dious ar mintin pa zave ha pa ze da gousket,
E pede Santez-Anna gant eur galon parfet
D'he breservi dious malheur ha goal chanç er bed-ma
Choaset en devoa da vam, Itron Santez Anna.

Mari ar Pensiou hanvet, eus a Alre,
En pad eus a c'hoec'h devez e poan a vugale,
Gant e fried voe goestlet dirag Santez-Anna,
Neuse souden e c'henas eur mab ar vaillanta.

Hac eur vaguerz youanc, o vag eur c'hrouadur
Da eur bourc'his a Naonet, comprenit ar maleur !
Eun devez o sortial, allas ! ne sonje quet,
Me lezaz ar c'hrouadur en e gavel cousquet.

O pebes trisdigues, glac'har spont hac horrer !
Pa zistro a vaguerz da ziguerri he dôr,
Pa zellas ouz ar c'havel, ar c'hrouadur voa enna
Contamet gant eur pennoc'h an anter anean

Hag hi commanc da grial, Itron Santez-Anna.
Petra deus da ober ? mencout a ra sempla,
Allas ! me a vel patant e vin sur punisset.
Balamour d'ar c'hrouadur a zo ganen maguet.

Ar bourc'his quenta glevas, a laç e c'hemeret,
Rentet e memes amzer e prison a Noanet.
Souden voe groët e froces vit bean punisset,
An Itron Santez Anna e deus-hi preservet.

Lennet e voa dirazi gant rigor ar setanç ;
Cunduet gant ar bourreo da guichen ar potanç,
Ha pignet e voa gantan betec ar vas huella.
Eno ec'h apparisas neuze Santez Anna.

Courach, emezi, va merc'h, n'ho pezo drouc ebet;
Ar c'hrouadur a zo yac'h, en e gavel cousquet;
Me a zo Santez-Anna, ho cuir advocadez,
A boe an oad a seiz v'las em pedec'h alies.

Ar bourc'his-ma pa glévas voa e vab ressuscitet
A gommenças da grial evel eun den follet;
En em strincas d'an daoulin evit goulén pardon
Ous Doue ha Santez-Anna eus a greiz e galon.

Me é an den miserabl a na veritan ket
Bez' amâ en ho presang d'an daoulin prosternet;
Me rai amant enorabl en plaç ar vagueréz,
Hac a c'houlénho pardon eus va fallagries.

Ar bourc'his a yas neuze da dy eun orfeber
Laqat ober en arc'hant form e grouadur qer.
Evit digaç en offranc da illis Santez-Anna,
A veler c'hoas an tensor en heur euz a vrema.

Ha Catel ha Bris hanvet, eus ar guer a Henbont,
A goeas bars ar rivier, ma yas dindan ar pont;
Gant an dour he voâ ruillet ha ma oa dindanna
Na bemzeg heur horolac'h abars dont aneze.

E mab, quenta ma glevas e voa e vam coet,
D'an itron Santez Anna gantâ e voe goeslet,
Demeus a dregont diner, eun oferen nôvet;
Ha dre e bras Santez-Anna ne devoe drouc ebet.

Eur vatimant marc'hadour, o listrei a Vourdel,
Forcet dre eur bar tourmant, tolet var eur rohel,
Hac e voe etre 'n daou dour ar spaç a dri devez,
Ma sonje ar vartolodet e coljent o buez.

Ar c'habiten skuizet bras hac e vartolodet.
Resoivet oll da vervel euz a greiz o yec'het,
En em strincjont d'an daoulin da grial, da oela,
Ouz en em recommandi d'hor mam Santez Anna.

Abars eur c'hard-heur goude ober e oréson
D'an itron Santez Anna eus a greis ho c'halon,
Ar mor ouz en em zével, al lestr querquent rentet,
Dre eur miracl ar brassa e rivier a Naonet.

Eur vatimant perisset bars e creis ar mor don
An equipach oll buezet, exceptet ar patron,
Pehini var eur planzen a chomas seiz devez;
Mes dre e bras Santez Anna e zovelas e vuez.

Da illis Santez-Anna e roas e bresant
Ar som demeus a vil scot eur galon en arc'hant,
Ac ouspen-ze eun daoulen guernisset eus a aour,
Ha pèvar guënnec varnuguent a roas da bep paour.

Incapabl on, christenien, da ziscleria bremâ
An nombr euz ar miçac'ou a ra Santez-Anna,
Var ar môr, var an douar, e qement plaç me feder
Supha ra Jesus da bardon d'ar pec'her.

Santez Anna ro certen ar guelet da re dall,
Ha d'ar re yud ar parlant, clêvet d'ar re voutar,
Remed d'ar re affliget, d'ar re gam ar c'herzet,
Soulsj d'ar vogalegon, ha d'an dud clân yec'het.

Amâ e ma eur feunteun eus ar c'hraçou Doue,
A recour yec'het d'ar c'horf ha bue d'an ene,
O tout da gôves enni ha da communia
D'an deiziou a zo choazet evit e bizita.

Bep meurs quenta eus a mis e caner an ofiç
En illis Santez-Anna, ouspen ar sacrific,
Evit consolation an oll pelerinét
A deu da Santez-Anna gant eur galon parfet.

Ar c'hoec'hvet deiz varnuguen demeus ar vis gueren
E ma gouel Santez-Anna hac ar solennite,
Gant ar Pab a zeus enni en deiz-ze, accordet
An induljançou plenier, remission d'ar pec'het.

Piou bennac a govessayo hag a gommunio
En illis Santez-Anna, en deiz-ze, a c'honeo
Pe gant devez a pardon, o tont da lavaret
Pemb Pater ha pemb Ave, recita eur chapelet.

O itron Santez-Anna ! ni o suppli hac o ped,
Pedet evidomp Jesus en pales an Drindet.
Evit goude hor maro, ma zemp oll da repos
Gant ar zent hac an cêles en gloar ar barados.

A dost da Santez Anna, sonjit, o chritenien ?
E zeus eur plaç a c'hlac'har, hanvet Parc-ar-Verzerien
O quitât Santez-Anna, ho quein troet d'an iliz,
Lavarit a greis calon : Pater, Deprofundis.

*Pedennou hag orezonou a gle ar Gristenien da lavaret
pere a zoug devotion da Santez-Anna*

Ho pezit sonj o Santez-Anna, Mam a gonsolation
penos ne voe clewet biscoas den o lavaret e vije bet
dilezet na refuset, ma teuje en affliction d'hoc'h invoq
ha d'ho pedi, ar galon touchant ar penitant en deveu
bet recours dec'h hac en deus goulennet hoc'h assistanç
Ho pedennou a deu da veza exaucet gant hor Zal-
ver Jesus-Christ : rac se e kemeromp esperanç ennoc'h
evel a ra an dud clân pere a deu d'ho pisita. Ni en em
adres dec'h eus a greiz hor c'halonou hac ho reclama-
momp humblamant. Accordit d'emp ar c'hraç da ellout
eur vech jouissa euz ar gloar eternal. Amen.

*Quement quech ma lavarfet an Oréson a zo ama varlec'h,
e c'honfet tregont mil bloas a pardon, accordet gant
an Tad Santel ar Pab Alexandr, da guement christen
a zo er bed.*

Ave Maria, gracia plena, Dominus tecum tua gracia si
mecum : benedicta tu in mulieribus e benedicta sis
sancta-Anna, mater tua, ey quâ sine macula et peccato
processiti, Virgo Maria : exte autem natus est Jesus-
Christus, Filius Dei vivi. Amen.

PEDEN

Doue oll galoudus hac eternal, c'hui pehini oc'h eus
deurvezetrei santez Anna eurus evit Mam da Vam ho Mab
unic, grit, ni o suppli, en eur enori e memoar dre eun
devotion fidel, ma obtenimp dre e meritou ar boneur
fidel, ma obtenimp dre e meritou ar boneur euz ar vuez
eternel, o c'hui pehini a rên e pad an oll amzeriou.

FIN.

(Propriété).